



CANTIC SPIRITUEL,

27⁴ a/

VAR BUEZ SANTEZ EODET,

GUINIDIC A ESCOPTI LEON.

Var ton Guers Theophilus.

CLÈVIT oll, tud yaouanc a escopti Leon,
Clèvit eur Vers nevez a doucho ho calon,
Composet er bloa-mâ en enor da Eodet,
Eur Zantes a Leon, herves ma zeo scrifet.

A Gastel Tremazan, e pares Landunvez,
Galon, eun dijentil eus ar c'haera lignez,
A zeuas da eureuji, evit genta pried,
Merc'h ar Prinç eus a Vrest, Florança voa hanvet.

Bugale o devoe, mes oll n'o hanvân get :
Unap eo Sant Tanguy, un all Santez Eodet ;
O daou pa gommancjont caout usach a rêson,
Gant o mam e voent disqet da ober orêson.

Da bratica'r vertuz, chasseal ar pec'het,
Da dec'hel diouto evel diouz serpentet ;
Ar pezh zo necesser a rê ar vugale,
Evit, goude ar maro, mont da velet Doue.

Hoguen ar maro cris, dinatur hac ingrat,
A lamas digante ho mam zantel ha mat,
A roas dê, siouas, eul lesvam milliguet,
Carguet eus a valiç ebars en o andret.

Ur bloas goude maro demeus a Florança,
Galon e Brosaos a c'has d'en em renta ;
Eno eun dimezel souden a eureujas,
Huel a galite hac eus a valiç bras.

E castel Tremazan pa voant en em rentet ,
 Pelec'h voa Sant Tanguy gant e oll c'hoarezet ,
 Souden ar vam nevez , güir lesvam leshanvet ,
 A gommanç d'o zreti evel eun drouc-speret.

Nemet ar blasfê mou ha mallosiou infam
 Na glêo an daou vuguel a c'henou o lesvam ;
 Evel torfetourien ouспен hi o c'hanne ,
 Hep nep respet d'o zad pehini e zamalle.

Sant Tanguy alafin o tont d'en em squiza ,
 Goude eiz bloas bemdez bet trêtet e c'his-mâ ,
 Gant conje mad e dad e yas prest da Baris ,
 Evit ouz e lesvam evita ar valiç.

Criz vize ar galon na zeuje da ouela ,
 O velet Sant Tanguy o tont da guimiada
 Diouz Santez Eodet , e c'hoar muia caret ,
 O façou dê o daou gant daelou goloet.

Penos , va breur Tanguy , eme Santez Eodet ,
 E teuit d'am dilezel da veza bourreviet ?
 Mes n'ouffemp pareat , arrêtoмп hon daelou ,
 Güell e ve ma souffren eguet souffr hon daou.

Sant Tanguy o ouela , na elle qet parlant ,
 Gant truez ouz e c'hoar , a gar parfetamant ,
 E galon gant glac'har a zo casi rannet
 O clêvet ar c'homzou eus e c'hoar Eodet.

Allas ! Eodet , bremân cetu c'houi hoc'h-unan ,
 Ruillet viot bemdez dre gastel Tremazan
 Gant an treid milliguet eus ar bleizes infam
 Zo couet deoc'h e partach elec'h eur güir lesvam.

Eodet , goude beza ouz e breur qimiadet ,
 A bromet da Zoue souffr gant paciantet
 Eus a bers he lesmam an oll insolancoù ,
 O respeti , senti , hep clasq nep rêsoniou.

He lesmam , er c'hontrol , a redoubl a valiç ,
 Dre voyennou revez e zourmant e pep guis ,

O velet e care calz vaqi d'an orêson ;
 Evit dont d'e ampech , cetu amàn ar rêson.

Darn he demezelet ha servicherezet
 A gassas en o hent evit caout ar sujet
 Da ober da Eodet labourat incessamant
 Er c'hamprou , er gueguin , hep dezi nep damant.

Dirac he orator bars en he c'habinet ,
 Oc'h ober orêson alies voe cavet ;
 Mes he lesmam mechant qement-se pa santas ,
 Orator , cabinet , tout en o ranversas.

Pa zonet er chapel ar c'hloc'h d'an oferen ,
 Pehini a gare da glêvet pen da ben ,
 Labourat er gueguin ha qerc'hat an oll dour ,
 Neuze e oblije hep rêi dezi sicour.

Ouz he zad , he lesmam , biscoas ne voe disent ;
 Gant respet bras e rê qement a ordrenent :
 Ha pa ne alle en deiz vaqi d'an orêson ,
 An darn brassa en nôs er rê a vir galon.

Gant avis he directour e promet da Zoue
 Birvjqen , emezi , pried ne divize ,
 Evit gallout bemdez sonjal er bassion ,
 A voa sur , pa elle , e occupation.

Gant e mam Florança e devoa bet disqet
 Donet da zoulaji ar beorien ezomet
 Calz eus a repasiou goude a rezerve ,
 Ilac hep gout d'he lesmam deo ractal er c'hasse.

Eun devez dre goal chaneh e rancontras Eodet
 O cass an aluzen d'ar beorien ezomet ;
 Hac eno var ar plaç gant outrach e c'hannas ,
 Ha bara ar beorien gant e zreid a flastras.

Goude e veza bresset d'ar chass prest en tolas ,
 En despet da Eodet , da Zoue e c'hrouas ;
 Ar Zantez paciant , hep lavaret ur guer ,
 A retorn d'ar c'hastel da offr oll d'hor Zalver.

Caer e devoa he lesmam dont d'he fêrsecuti ,
 Na fallont qennebeut dont d'e aneanti ,
 Ar brud eus he vertuz partout a voa scuillet ,
 A denne an noblanç da zont oll d'e gûelet.

O velet qementse , e arrach a gresqe ;
 Pa velas an noblanç a guenta qalite
 O tonet d'e reglasq evit e eureuji ,
 Hac a bep avantach o tont d'e assuri.

Bete bremàn Eodet so bet indifferant ,
 Oll qement tra a zouffr a zouffr hep nep damant ;
 Mes donet da zemezi bigen ne gonsantje ,
 Goude rêi da Jesus he c'horf hac he ene.

Er fêçon-mâ dezàn ec'h adress e feden :
 Jesus , va gûir bried , permett e varvfen
 Qent eguet birvigen terri ar bronnessa
 Pini ameus great deoc'h hac a ratifiân.

Ar valiç eus he lesmam a servichas dezi
 Da ampech ma rancche donet da eureuji ,
 O velet e zedo en eun estim qer bras ,
 Prest pell diouz ar c'hastel var ar meaz e c'hassas.

Eno en eun tiig hac én meurbet dister ,
 Bemdez e orêzon a offre d'hor Zalver ,
 Ha calz a œuvrou-mad bemdez a exerce
 En andret pep-unan ha gûella ma elle.

Calz a blac'het yaouanq a voa bars er c'hanton
 Dre e scol , e exempl touchet en o c'halon ,
 A renonças a grenn da vaximou ar bed ,
 En em roâs da Zoue dre garantez barfet.

Erfin e breur Tanguy a Baris distroet ,
 E castel Tremazan prest eo en em rentet ,
 Hac hep e anavezout er zal e voe conduet ,
 E pelec'h ma yoa calz eus a zemezelet.

Ha pa voa gant an oll gant respet saludet ,
 Souden e c'houlennas pelec'h edo Eodet ;

Qer buan e lesvam en tennas a gostez ,
E sònjat e c'hlasseq evit ober al lez.

Neuze an traitourez a lavaras dezàn :
Còves ar virionez ouzoc'h a zeziràn ;
An demezel Eodet a zo eur plac'h collet ,
Zo eur prostitueta a guement a gafet.

He obstination , he buez debordet
D'he c'hass var ar meas en deus hor c'hontraignet.
Hac e clasq , allas ! golo gant guelloc'h facilite
Maleur eun demezel demeus e c'halite.

O credi re vuan , Tanguy a zortias ,
Gant coler ar brassa e c'hoar baour a glasqas
E qichen eur feunteun e voelc'hi he dillat ,
Evel ma er güelas en e galvas timat.

Eodet pa er c'hlêvas a gommanças tec'het ,
Rac ma zoa en ganti oll dianavezet ;
Mes en ouz e foursui neuze prest e zrapas ,
Ha gant un tol cleze a greun e dibennas.

Pa voa couezet d'an douar , o velet he bruchet
Carguet a lez-caoulet hep gouzout ar sujet ,
Diouz an amezeyen neuze en em informas
Eus a vuez Eodet , ar pezh en estonas.

An dud oll glac'haret a lavaras dezàn :
Bevet en deus Eodet assur bete vremen
Gant peb seurt santelez , exempl vad ar c'hanton ;
Glac'har vras hon eus dezi eus a greiz hor c'halon.

He lesmami cris , allas ! e deveus-hi chassee
Eus a gastel he zad hac amañ banisset
Gant peb seurt paourentez , al lêz oc'h eus güelet
Da zoulaji ar paour e cus voa destinet.

Pa en devoa Tanguy ar virionez clêvet ,
E voa dare dezàn mervel gant an despet ,
Gant qeuz en e galon d'e beza dibennet ,
O credi re-vuan e lesvam counnaret.

D'ar c'hastel e teuas da gaout e dad Galon ,
 En eur scuilla daelou eus a greiz e galon ;
 Pa antreas er zal e dad a rancontras ,
 Qer buan d'an daoulin dirazàn en em stringas.

Eno e lavaras : me eo ho mab Tanguy ,
 A verit ar maro , hep caout nep damant din.
 Allas ! siouas , allas ! va c'hoar muya caret
 Gant eun tol cleze a meus bet dibennet.

E vouela da Eodet pa voant eno o daou ,
 Al lesvam voa en joa gñelet oll e canvou ;
 Souden e creiz ar zal , Eodet a antreas
 He fenn en he daouarn eno ec'h apparissas.

Eno var he gouzoug e fenn a appliqas ,
 Hac evel diagent outi en em stagas ;
 Qerqent ouz he lesmam e tro publicamant ,
 Hac evellen outi e commanças parlant :

Pep tra oll er bed-mâ en devez e amzer ;
 Doue betec eur poent a zouffr gant ar pec'her ;
 O maliç en devez souffret bete bremâ ,
 Emâ o prepari donet d'ho punissa.

Adieu eta , lesvam dinatur hac ingrat ,
 Deut eo an heur bremâ deomp d'en em gñittat ;
 Great eo ac'hanoc'h , prest eo coler Doue
 Da gñeza var ho penn pad an eternite.

Eur c'hren gen violant eno e c'hemerass ,
 He antraillon couezet gant he zreid a bressas ;
 Erfin gant e arrach d'an douar en em stringas ,
 Hac evel ma velot he buez a finissas.

Azious'h ar c'hastel ar gurun o trouzal ,
 A zeuas da sponta qement a voa er zal ,
 Qer buan o coeza e crevas an dōen ,
 Hac hep offauci den he losqas pen-da-ben.

An dud oll estonet a deuas da grena
 O velet eun Itron demeus a greiz he joa

Ebars en eun instant e luda voe rentet ,
Allas ! hac he ene livret d'an drouc-speret.

Incontinant Eodet ouz he breur a droas ,
Hac ountâ publicamant evelen a gomzas :
Pa em güeljoc'h , va breur , me n'oc'h anayen qet ,
Ar pez a roas din güir sujet da dec'het.

Mes cuzul hon lesvam a oun ervat bremâ
Eo dec'h ar sujet da zont d'am dibenna ;
Ha rac-se ar Verc'hes meus pedet a galon
Da c'houlén evidoc'h digant Doue pardon.

Qer buan d'an daoulin Tanguy en em strincas ,
Ous e c'hoar a galon pardon a c'houlennas ;
Pardon va c'hoar , pardon d'ho peza massacret ,
Va c'halon gant glac'har a zo qazi rannet.

He oll sacramanchou goude a recevas ,
Hac ebars eun instant adare e varvas ,
Neuze gant an æles d'an ên e voe cunduet ,
Endra pado Doue da veza curunet.

He c'horf goude a voe enterret gant enor
En pares Landunvez peurdost da vord ar mor ;
Eno e deveus bet great calz eus a viraclou ,
Aboa voa he ene er gloar eus an ênvou.

Perac , oll tud yaouanq , coulz ha santez Eodet ,
Ne zentit ouz ho tud , renta dezo respet ?
Perac ne andurot pa en deveus anduret
Gant eul lesvam gruel a guement a gafet !

Perac diouz ar pec'het hac an occasion ,
Na dec'het coulz hac hy hac ober orêson ,
Pa zeo güir ar Verc'hes rac an æl a spontas ,
Ha Santez Eodet rac e breur a dec'has ?

Perac , pa zoc'h fragil evel m'eo eur pôd pri ,
N'ho przo qet a spont hac er mez hac en ty ?
Rac an occasion da goueza er pec'het ,
E fot tec'hel ounti calz a dud zo daonet.

E chom re dest d'an tan e tener d'en em boazat ,
 E chom diulan ar glao en em glebier timat ,
 Evit an occasion na güesset get er pec'het ,
 N'oun nemet tri remed : tec'het , tec'het , tec'het .

Tec'het prest... ar maro bemdez a didosta ,
 Mar guell ho surpréno pa sonjoc'h nebeuta ;
 Calz eus a dud yaouanq oc'h eus anavezet ,
 Hac a greiz o yec'het he deveys discaret .

Queuz ho pezo neuze faut da veza heuillet
 An exempl a vertuz eus a Santez Eodet ;
 Commancit eta bremâ da veva evelti ,
 Hac e viot en ên curunet coulz hac hi .

Pelloc'h eta pa viot gant ho tud goall drêtet ,
 Ouz castel Tremazan troit prest ho speret :
 Gant he lesmam eno petra souffr Eodet ,
 Sônjit ha grit evelti , gant Doue viot paeet .

Ar vers-mâ zo dediet da yaouanqis Leon ,
 En pehini , mar qeront , e cavint ar fêçon
 Da bralica ar vertus , caret Doue a galon ,
 Dre exempl ar Zantez bevet en o c'hanton .

Itron Santez Eodet , bezit avocadez
 Da yaouanqis Leon , heuilla rint ho puez
 Oll güella ma ellint en amzer da zonet ,
 Cetu amâ ar c'hontrat ganto oll goarantet .

Etrezomp , tud yaouanq , a escopti Leon ,
 Pelloc'h e promettomp demeus a güir galon
 Imita ar vuez eus Zantez Eodet ,
 Evit goude'r maro mont d'an ên d'e güelet .

FIN.

E Montroulez , e ty LÉDAN , e traòn ru ar Vur .